

GINIVELEZH HOR SALVER

OFERENN AN DERC'HENT

An Oferenn-mañ a vez lavaret d'ar 24 a viz Kerzu, a-raok pe goude Gousperoù kentañ ar gouel.

Lennadenn gentañ

Lennadenn eus levr Izaia 62, 1-5

En em blijet en deus an Aotrou ennout-te.

¹ En abeg da Sion ne davin ket,
hag abalamour da Jeruzalem ne baouezin ket,
Ken na skedo he reizhder evel ur gouloù-deiz,
Ken na lugerno he silvidigezh evel ur flammerenn.

² Ar broadoù neuze a welo da c'hourdrec'h,
Hag an holl rouaned da splannder,
Ha galvet e vi dre un anv nevez
Bet diskleriet gant genoù Doue.

³ Bez' e vi ur gurunenn hollgaer e dorn Doue,
Un daledenn roueel etre bizied da Zoue.

⁴ Ne vi ken anvet : An hini dilezet !
Na da zouar ne vo ken anezhañ : An hini distaolet !
Met galvet e vi : Va dudi !
Ha da vro a vo anvet : Ar plac'h nevez !
Rak Doue a laka ennout e blijadur,
Ha da vro a vo priedet gantañ.

⁵ Evel ma timez un den yaouank gant ur werc'hez
E timezo ganit an hini en deus da savet,
Hag evel ma 'z eo ar wreg yaouank levez he fried,
Evel-se e vi-te levez vras da Zoue.

Salm

89 (88), 4-5. 16-17. 27 ha 29

D : Trugarezioù an Aotrou da viken a ganmeulin.

⁴ «Skoulmet em eus un emglev gant an den am eus dibabet,
touet em eus ul le da Zavid va servijer :

⁵ Diazezañ a ran da lignez evit atav,
startaat a ran da dron evit an holl remziadoù.»

¹⁶ Eürus ar Bobl a oar youc'hal en enor deoc'h,
a gerzh e sklêrijenn ho tremm, Aotrou,

¹⁷ ar re a gav bepred ho levez en hoc'h anv,
hag en ho reizhder an nerzh da adsevel.

²⁷ Eñ am galvo : «Va Zad oc'h-C'hwi,
va Doue ha roc'h va silvidigezh !»

²⁹ Va gras a virin gantañ da viken,
ha va emglev a chomo feal en e geñver.

Eil lennadenn

Lennadenn eus levr Oberoù an Ebestel 13, 16-17, 22-25

Testeni Paol diwar-benn ar C'hrist, mab David.

Degouezhet e kêr Antiokia Bro-Bisidia, Paol a oa aet d'ar sinagogenn.

¹⁶ Paol a savas, a wignas gant e zorn hag a lavaras :

«Israeliz ha C'hwi, doujerien Doue, selaouit.

¹⁷ Doue ar bobl-mañ, Doue Israel, en deus dibabet hon Tadoù ha lakaet ar bobl-mañ da greskiñ e-pad he harlu e Bro-Ejipt, gant nerzh bras e vrec'h en deus o zennet er-maez anezhi.

²² O vezañ e dennet a gostez e lakaas da sevel dezho David da roue.

Ha da hemañ en deus douget an testeni-mañ :

Kavet em eus David, mab Yese,

un den hervez va c'halon, a gaso da benn va holl vennadoù.

²³ Ha diwar ziskennadur hemañ, en deus Doue, hervez e c'hrataenn, lakaet da sevel da Israel Jezuz e-giz Salver.

²⁴ Yann en devoa prezeget, evel diaraoger, e zonedigezh, en ur gemenn ur vadeziant a geuz da holl bobl Israel.»

²⁵ Ha paz edo Yann gant disoc'h e redadenn e lavare :

An hini a soñjit ez on-me, n'on ket.

Met setu ma teu war va lerc'h an hini n'on ket dellezek da ziskoulmañ sandalenoù e dreid.

Aviel

Penn kentañ Aviel Jezuz Krist hervez Mazhev 1, 1-25 * 18-25 (Lenn. verr)

Lignez Jezuz Krist, mab David (an hini hirañ).

¹ Levr genelezh Jezuz Krist, mab David, mab Abraham.

² Abraham a engehentas Izaak. Izaak a engehentas Jakob. Jakob a engehentas Youda hag e vreudeur. ³ Youda, eus Tamar, a engehentas Farez ha Zara. Farez a engehentas Esrom. Esrom a engehentas Aram. ⁴ Aram a engehentas Aminadab. Aminadab a engehentas Naason. Naason a engehentas Salmon. ⁵ Salmon, eus Rac'hab, a engehentas Booz. Booz, eus Roud, a engehentas Obed. Obed a engehentas Jese. ⁶ Jese a voe tad d'ar roue David.

David a engehentas Salomon eus an hini a oa pried Ouri. ⁷ Salomon a engehentas Roboam. Roboam a engehentas Abia. Abia a engehentas Asa. ⁸ Asa a engehentas Josafat. Josafat a engehentas Joram. Joram a engehentas Ozias. ⁹ Ozias a engehentas Joatam. Joatam a engehentas Ac'haz. Ac'haz a engehentas Ezekias. ¹⁰ Ezekias a engehentas Manase. Manase a engehentas Amon. Amon a engehentas Josias. ¹¹ Josias a engehentas Iekonias hag e vreudeur da vare an harlu e Babilon.

¹² Ha goude an harlu e Babilon, Iekonias a engehentas Salatiel. Salatiel a engehentas Zorobabel. ¹³ Zorobabel a engehentas Abiud. Abiud a engehentas Eliakim. Eliakim a engehentas Azor. ¹⁴ Azor a engehentas Sadok. Sadok a engehentas Ac'him. Ac'him a engehentas Eliud. ¹⁵ Eliud a engehentas Eleazar. Eleazar a engehentas Mattan. Mattan a engehentas Jakob. ¹⁶ Jakob a engehentas Jozef, pried Mari, an hini m'eo bet ganet anezhi Jezuz a anver Krist.

¹⁷ En holl eta, adalek Abraham betek David ez eus pevarzek remziad; adalek David betek an harlu e Babilon, pevarzek remziad; adalek an harlu e Babilon betek ar C'hrist, pevarzek remziad.

¹⁸ Hogen, ginivelezh Jezuz Krist a c'hoarvezas evel-henn. Mari, e vamm, o vezañ grataet da Jozef e dimezi, en em gavas dougerez dre c'halloud ar Spered Santel, a-raok dezho mont da vevañ a-gevret.

¹⁹ Jozef, he fried, dre ma oa un den reizh anezhañ, ha ne felle ket dezhañ he gwallvrudañ, a reas e vennozh d'en em zispartiañ dre guzh diouti. ²⁰ Divizet en devoa kement-se pa 'n em ziskouezas dezhañ dre e gousk, un Ael eus an Aotrou, a lavaras dezhañ : «Jozef, mab David, n'az pezh ket aon da gemer ganit Mari da bried; rak ar pezh a zo bet engehentet enni a zeu eus ar Spered Santel.

²¹Genel a ray ur mab hag e roi dezhañ Jezuz da anv, rak eñ a salvo e bobl eus he fec'hedoù.»
²²Ha kement-se a c'hoarvezas evit ma teufe da wir ar pezh en devoa lavaret an Aotrou dre gomz e brofed : ²³«*Setu ma vo ar Werc'hez o tougen ha ma c'hano ur mab a vo anvet Emmanuel*», da lavarout eo Doue ganimp. ²⁴Jozef, ur wezh dihunet eus e gousk, a reas hervez m'en devoa gourc'hemennet Ael an Aotrou : kemer a reas e bried en e di. ²⁵Met n'en devoa ket graet priedelezh ganti a-raok dezhi genel he mab, hag e roas da hemañ Jezuz da anv.

OFERENN AN NOZ

Lennadenn gentañ

Lennadenn eus levr Izaia 9, 1-6

Ur Mab a zo roet dimp.

¹Ar bobl a gerzhe en deñvalijenn
He deus gwelet ur sklêrijenn vras,
Ar re a oa o chom e bro skeud an Ankoù, eo paret ar gouloù warno.
²Laouenaet hoc'h eus tud ho poblad ha kresket o levenez;
Tridal a reont dirazoc'h evel ma trider da vare an east,
Evel ma trivli an drec'hourien, pa lodennont an dibourc'hioù.
³Rak ar yev a veze o pouezañ warno,
Ar gelastrenn a skoe gant o c'hein,
Gwialenn o gwaskour, o zorret hoc'h eus evel en deiz Madian.
⁴Rak holl votoù ar vrezelourien o vac'hañ an douar,
An holl vantelloù bet saotret gant ar gwad,
Setu int taolet en tan ha lonket gant ar flamm.
⁵Rak ur bugel a zo ganet dimp, ur mab a zo roet dimp,
A zo bet lakaet ar galloud war e zivskoaz,
Hag anvet e vezo, kuzulier burzhudus, Doue kadarn,
Tad peurbadel, priñs ar peoc'h ;
⁶Evit astenn e veli, ha reiñ ur peoc'h diziwezh
Da dron David ha d'e rouantelezh,
Evit en diazezañ hag en startaat
Er reizhder hag er gevionded
A-dal vremañ da virviken :
Gred Aotrou hollc'halloudek a raio kement-se !

Salm

96 (95), 1-2a. 2b-3. 11-12. 13

D : Hiziv eo ganet evidomp ur Salver, ar C'hrist, an Aotrou eo.

¹Kanit d'an Aotrou ur ganenn nevez,
kanit d'an Aotrou, tud an douar a-bezh.
²Kanit d'an Aotrou, bennigit e anv,
a zeiz da zeiz embannit e silvidigezh.
³Diskleriit e c'hloar e-touez ar broadoù,
e vurzhudoù e-touez an holl bobloù.
⁴Rak bras eo an Aotrou, ha holl zellezek a veuleudi,
ha spouronus dreist an holl doueoù.
¹¹Ra vo levenez gant an neñv, ha ra drido an douar,
ra sono ar mor gant kement a vev ennañ;
¹²ra laouenaio ar maezioù ha kement a zo enno.
Hag holl wez ar forest da youc'ho a levenez.

¹³ Dirak an Aotrou, rak emañ o tont,
emañ o tont da ren an douar.
Ren a raio an hollved gant reizhded,
hag ar pobloù hervez e wirionez.

Eil lennadenn

Lennadenn eus lizher da Ditoz 2, 11-14

En em ziskouezet eo gras Doue d'an holl dud.

¹¹ En em ziskouezet eo gras Doue, o tegas silvidigezh d'an holl dud.

¹² Kelenn a ra dimp nac'hañ an direlijion ha c'hoantegezhioù ar bed,
evit bevañ gant furnezh, reizhder, ha doujañs Doue er bed a-vremañ,

¹³ en ur c'hortoz ar goubeizh eürus,
an deiz m'en em ziskouezzo gloar hon Doue bras ha Salver, ar C'hrist Jezuz.

¹⁴ Eñ hag a zo en em roet evidomp evit hon dasprenañ eus pep drougiezh,
hag evit hon glanaat d'ober ac'hanomp, dezhañ e-unan,
ur bobl dibabet, douget d'an oberoù mat.

Aviel

Pennad eus an Aviel santel hervez Lukaz 2, 1-14

Ganet ez eus ur salver hiziv evidoc'h.

¹ En deizioù-se e voe embannet ur gourc'hemenn a-berzh Kaesar Aogustus
evit enskrivañ holl dud an douar.

² Ar skrid-embann kentañ-se a voe graet p'edo Kurinus gouarnour Siria.

³ Mont a rae an holl da lakaat o anvioù, pep hini d'e gêr.

⁴ Jozef a savas eus Galilea, eus Kêr Nazared, da Vro-Youdea,
betek kêr David anvet Betlehem,

o vezañ ma oa eus tiegezh ha bro David,

⁵ da lakaat e anv gant Mari, e bried, hag a oa dougerez.

⁶ Hag e-pad m'edont eno e teuas eviti an amzer da wilioudiñ

⁷ hag e c'hanas he mab kentañ-ganet;

e vailhuriñ a reas hag e lakaat a reas en e c'hourvez en ur prezeb,
dre ne oa ket plas evito en ostaleri.

⁸ Mesaerien a oa er c'hornad-se o chom neuze war ar maez
hag oc'h ober ged e-pad an noz da ziwall o loened.

⁹ Un Ael eus an Aotrou a skedas en-dro dezho, ma voent spontet bras.

¹⁰ Met an Ael a lavaras dezho :

«Na spontit ket, rak setu ma tegemennan deoc'h ur c'heloù mat
hag a roio levenez vras d'an holl bobl.

¹¹ Ganet ez eus bet deoc'h hiziv, e kêr David,
ur Salver, hag a zo ar C'hrist, an Aotrou.

¹² Ha setu an arouez evidoc'h :

Kavout a reot ur bugelig mailhuret ha gourvezet en ur prezeb.»

¹³ Hag en un taol ec'h en em unanas gant an Ael
ur bagad bras eus armead an neñvoù o veuliñ Doue hag e lavarent :

¹⁴ «Klod da Zoue e lein an Neñvoù,
ha peoc'h war an douar d'an dud a blij dezhañ.»

OFERENN AR PELLGENT

Lennadenn gentañ

Lennadenn eus levr Izaia 62, 11-12

Setu ma teu da silvidigezh.

¹¹ Sed ar pezh a embann Doue betek harzoù an douar :

«Lavarit da verc'h Sion :

Gantañ emañ garedon e c'hourdrec'h,

ha dirazañ e kerzh gopr e c'hounid.

¹² Galvet e vint : Ar bobl santel, dasprenidi an Aotrou !

Ha te, anvet e vi : An hini glasket ar Gêr nann-dilezet !»

Salm

97 (96), 1. 6, 11-12

**D : Ur sklêrijenn he deus skedet hiziv warnomp,
rak ganet eo evidomp an Aotrou.**

¹ An Aotrou a ren ! Ra drido an douar,
ra vo levez gant bed an inizi.

⁶ An neñvoù a skrij oc'h embann e reizhder,
an holl bobloù a wel splannder e c'hloar.

¹¹ Ur sklêrijenn a bar evit an den reizh,
al levez evit an dud reizh a galon.

¹² Tud reizh, ho pet levez en Aotrou,
ha kanmeulit santelezh e anv.

Eil lennadenn

Lennadenn eus lizher an Abostol Paol da Ditoz 3, 4-7

Hon salvet en deus hervez e drugarez.

⁴ Hogen d'an deiz ma'z eo en em ziskouezet madelezh hon Doue Salver
hag e garantez evit an dud, ⁵ en deus hor salvet,
n'eo ket en abeg d'an oberoù a reizhded hor bije graet,
met diwar doug e drugarez,
dre walc'hadenn an azgenel hag an adneveziñ er Spered Santel.

⁶ Hag ar Spered-se, e skuilhet en deus warnomp a-builh,
dre Jezuz Krist, hon Aotrou, ⁷ en doare ma c'hounezimp, er goubeizh,
hêrezh ar vuhez peurbadel pa'z omp bet reizhet gant gras ar C'hris.

Aviel

Pennad eus an Aviel santel hervez Lukaz 2, 15-20

Ar bastored a gavas Mari ha Jozef hag ar bugel.

¹⁵ Pa voe aet an Aeled diouto war-zu an neñv,

e lavaras ar vesaerien an eil d'egile :

«Deomp eta betek Betlehem ha gwelomp ar pezh a zo c'hoarvezet
hag a zo bet diskleriet dimp gant an Aotrou.»

¹⁶ Hag ez ejont, mall warno, hag e kavjont Mari ha Jozef
hag ar bugelig gourvezet er prezeb.

¹⁷ O welout se ec'h anavezjont ar wirionez eus ar pezh
a oa bet lavaret dezho diwar-benn ar bugel-se.

¹⁸ Ha kement hini o c'hlevas a voe sebezet gant ar pezh a gonte ar vesaerien dezho.

¹⁹ Mari avat, a vire an holl draoù-se hag a brederie warno en he c'halon.

²⁰ Neuze ez eas ar vesaerien en-dro, en ur reiñ klod ha meuleudi da Zoue,
evit kement o devoa gwelet ha klevet, hervez ma oa bet lavaret dezho.

OFERENN AN DEIZ

Lennadenn gentañ

Lennadenn eus levr Izaia 52, 7-10

Holl pennoù an douar a welo silvidigezh hon Doue.

⁷Pegen kaer war lein ar menezioù treid ar c'hannad a geloù mat,
Degaser ar peoc'h, degemener an eürusted,
Embanner ar silvidigezh,
An hini a lavar da Sion : Da Zoue a ya da ren !

⁸Ur vouezh ! Da c'hedourien a sav o mouezh,
Hag holl a-gevret e youc'hont,
Hag o daoulagad a wel dirak o daoulagad
An Aotrou o tistreiñ da Sion.

⁹Youc'hit a levenez, holl a-unan, o dismantrou Jeruzalem !
Rak an Aotrou a ro frealz d'e bobl, dasprenañ a ra Jeruzalem.

¹⁰An Aotrou a laka e noazh e vrec'h a santelezh a-wel d'an holl vroadoù,
Hag holl dermenoù an douar a verzo silvidigezh hon Doue.

Salm

98 (97), 1, 2-3ab, 3cd-4, 5-6

D : Holl harzoù an douar o deus gwelet silvidigezh hon Aotrou.

Kanit d'an Aotrou ur ganenn nevez,
dre m'en deus graet burzhudoù.
Gounezet en deus an trec'h gant e zorn dehou,
ha gant e vrec'h santel.

²An Aotrou en deus diskouezet e silvidigezh,
diskleriet en deus e reizhder d'an holl vroioù.

³Soñj en deus bet eus e vadelezh
hag eus e fealded e-keñver tiegezh Israel.

Gwelet o deus broioù pellañ an douar
silvidigezh hon Doue.

⁴Youc'hit d'an Aotrou, C'hwi an holl douaroù,
tridit gant levenez ha kanit.

⁵Salmit d'an Aotrou war an delenn,
war an delenn ha gant son ar gitar;

⁶gant an drompilh ha gant mouezh ar c'horn,
youc'hit d'an Aotrou, ar roue.

Eil lennadenn

Lennadenn eus lizher d'an Hebreed 1, 1-6

Doue en deus komzet ouzhimp en e Vab.

¹Goude bezañ, meur a wezh hag e meur a c'hiz,
komzet gwezhall ouzh hon Tadoù dre ar Brofeded,

²Doue, en deizioù-mañ, ar re ziwezhañ,
en deus komzet ouzhimp dre ar Mab,
an hini bet lakaet gantañ da benn-hêr war bep tra,
hag ez eo drezañ ivez en deus krouet ar bedoù.

³Sked e splannder hag eilskeudenn e anien,
ar Mab-se hag a zalc'h pep tra er bed dre nerzh e gomz,
goude bezañ kaset da benn glanedigezh ar pec'hedoù,
a zo aet d'azezañ en tu dehou da Veurdez-Doue e barr an neñvoù,

⁴O tont evel-se da vezañ seul uheloc'h a-us d'an Aeled,
m' en deus resevet da hêrezh un anv a-us d'o hini.

⁵Da behini eus an Aeled en deus Doue lavaret biskoazh :
«Va Mab out-te; me eo am eus da c'hanet hiziv.»
Pe c'hoazh : «Me a vo evitañ un Tad, hag eñ a vo evidon ur Mab.»
⁶Hag adarre, p'emañ o tegas war an douar e Vab kentañ-ganet e lavar :
«Ra vo azeulet gant holl Aeled Doue.»

Aviel

Pennad eus an Aviel santel hervez Yann 1, 1-18 * 1-5. 9-14 (Lenn. verr e lizherennoù tev)

Ar Verb a zo en em c'hraet den hag en deus bevet en hon touez.

¹Er penn kentañ edo ar Verb, hag ar Verb a oa gant Doue hag ar Verb a oa Doue.

²Er penn kentañ e oa gant Doue.

³Drezañ eo bet graet pep tra, hag heptañ n'eus bet graet netra.

⁴Ar pezh a zo bet graet ennañ a oa buhez, hag ar vuhez-se a oa sklêrijenn an dud.

⁵Hag ar sklêrijenn a splann en deñvalijenn hag an deñvalijenn
n'he deus ket he dalc'het.

⁶Bez' e voe un den kaset gant Doue, Yann e anv.

⁷Hemañ a zeuas evit un testeni, evit bezañ test d'ar sklêrijenn, evit ma kredje an holl drezañ.

⁸N'eo ket eñ a oa ar sklêrijenn, met dont a rae evit reiñ testeni d'ar sklêrijenn.

⁹Ar sklêrijenn, an hini wirion hag a sklaera pep den, a oa o tont er bed.

¹⁰Er bed edo, ha drezañ eo bet graet ar bed,
met ar bed n'en deus ket e anavezet.

¹¹Deuet eo en e dra, hag e re n'o deus ket e zegemeret.

¹²Met da gement hini en deus e zegemeret,
en deus roet ar galloud da vezañ bugel da Zoue, d'an neb a gred en e anv,

¹³eñ ha n'eo ket bet ganet eus ar gwad, nag eus youl ar c'horf, nag eus youl an den, met eus Doue.

¹⁴Hag ar Verb a zo deuet da vezañ korf ha savet en deus e deltenn en hon touez,
ha gwelet hon eus e c'hloar, gloar o tont dezhañ eus e Dad,
evel Mab unganet, leun a c'hras hag a wirionez.

¹⁵Yann a ro testeni diwar e benn hag a youc'h en ur lavarout :

«Hemañ eo an hini a lavaren dioutañ :

An hini a zeu war va lerc'h a zo tremenet dirazon, dre m'edo araozon o vezañ.»

¹⁶Ya, eus e leunder hon eus resevet holl, ha gras evit gras.

¹⁷Rak al Lezenn a zo bet roet dre Voizez, met ar c'hras hag ar wirionez a zo deuet dre Jezuz Krist.

¹⁸Doue, den ebet n'en deus e welet biskoazh;

ar Mab unganet Doue, an hini a zo en askre an Tad, hennezh en deus e roet da anavezout.